

868 A



# KLOAREC KOAT AR RANNOU

HA

## PENN-HEREZ KERZANTON



War don : Kurunen aour ha perlez ann Itron Vəria Rumengol

### Karantez ha glac'har !!!

I

Tud iaouank a Vreiz-Izel, didoztait da glevet  
Ar recit euz va daëlou ha va foaniou kalet :  
Me so eur c'holoarek iaouank a eskopti Kemper  
Am boa choazet eur vestrez enn eskopti Treguer.

E c'harz ar mor oun ganet e bro sant Gwenole,  
Ha biskoas nemet glac'har n'em euz bet em hue :  
Glac'har ha guir garantez, setu va flaneden,  
Planeden rust ha kalet da heulia penn-da-benn.

Pa oan em bugaleach va mamm baour aliez  
A lavare d'in : « Va mab, kar ha pédi ar Werc'hez,  
» Ped anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,  
» Mar he fédez a galon, biken ne di da goll. »

Patronez va mamm dener, Gwerc'hez va Remengol,  
Pet gweach oc'h euz-hu miret na dounn me eat da goll !  
Ho pedet am euz bepret... breman arok mervel,  
E kaninn ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II

Pa gimiadiz dioc'h va zud, pa ziz pell eus ar ger,  
Evit mont war ar studi e skolach Landreguer,  
N'em boa nemet pemzek vloa, me a wele dourek,  
Rag evidon ne vəa ken, allaz, a eurustet !!...

O-tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik,  
Koant vel eun elik Doue, he hano oa Metik,  
D'ar gouent e zea ive, evel d'on d'ar studi,  
He c'halonik oa manfret kement ha va hini.

» Salud deoc'h, plac'hik iaouank, a laveriz dez-hi,  
» Evel d'oun oc'h ankeniet o kuitat tud ho ti ;  
» Ho tornik flour em dormik lakit gant karantez,  
» Hag e vezimp eurussoch o wela assamblez. »

Ar plac'hit a layaraz : « O kloarek Gwenole,  
» Pedomp Doué aliez ann eil 'vit eguile ;  
» Er joa koulz hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik,  
» Euz a vreman da viken e vo ho mestrezik. »

» O Metik, va c'harante, rozen gaér Breiz-lzel !  
» War ho mignon Gwenole tolit breman eur zell,  
» Eur zell digant ho lagad a rai va eurustet  
» Keit a malezo Doue ac'hanon war ar bed. »

Erru e kear Landreguer, erru e penn hon hent,  
Me oe kasset d'ar skolach, ha Metik d'ar gouent ;  
Ann disparti oe kalet, c'huero hag ankeniuzez ;  
Ann eurustet, er bed man siouas ! n'eo ket paduz !...

'Tre ma chomiz er skolach, skeuden douz Metik kez  
Enn deiz, en noz dirazon a duez aliez,  
Neuze e peden Doue ha Sent koz Breiz-Izel  
'Vit ma vije he bue laouen, euruz, santel.

### III

Pa oe echu va studi ez iz da Remengol  
Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad Remed-oll ;  
Seiz tro a riz d'ann aoter, devez ar padon braz  
Ha seiz tro d'ann Iliz sakr war benn va daoulin noaz.

Goudre ann oferen bied, ô pebeuz levenez !...  
Er vered gent he mamm ger, e velis Metik kez :  
Laouen oa evel ann deiz ha koant evel al loar,  
Biskoaz pen-herez ker koant n'euz bet war ann douar.

Luguerni a re he zall, he dion chod gwen ha ru,  
He ginou, vel eur rosen, he bleo, he lagad du,  
Eur groas aour en he c'herc'hen, he c'hoef dantelezet,  
Lavaret 'vije eun eal euz ann en diskennet.

« O ! pebeus joa evidomp, va c'hloarek Gwenolé,  
» En em gaout e Remengol, deiz pardon Mamm Doue,  
» Mamm ann oll dud ankeniet, Gwenole, ma mignon,  
» Evidout e peb amzer, he fediz a galon.

» Metik koant, setu aman, setu ar voalen aour  
» A roaz d'in, arog meravel, Annaïk, va mamm baour,  
» Doug anez-hi war da viz, kemer-hi dihan-en,  
» Me dou war goalen va mamm d'az karet da viken.

» Ar groz aour zo em c'herc'hen a vo did, Gwenole,  
» Eur guchen euz va bleo du a roan did ive ;  
» War ar groaz se e touan ha dirag ar Werch'ez  
» E vi karet gant Metik t're ma vo e buez. »

Ha daoulinet en Iliz, hon euz gred hor peden,  
He roet evit offrants, eur c'houriz koar melen,  
Binniget hor medalen, poket d'ar relegou,  
Da relegou Sent Breiz, karet gant hon tadou.

Goude hon eus balect hon daou dre Vreiz-lzel,  
Ha guelet kalz 'ilizou, kalz a douriou huel,  
Abbatie Landevennek ha mor Douarnenez,  
Lec'h ma oe beuzet kear Is hag ar brincez Ahez.

Gwelet hon deus Mene-Hom, hag iliz veur Kemper,  
Mene-Bre, iliz Bulat hag hini Landreguer,  
Kastel Brest, Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaün ar foll,  
Ha kaëra tour zo er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Ker-Ahez, Kemperle Pont-n'Abat,  
Fouenan, bro ar merc'hed koant, Gwengamp hag Huelgoad  
Montroulez ha Lann-Huon, Krozen ha Lez-n-even,  
Kallak, bro ar gourinou, Kastel-lin, Rosporden.

Klevet on euz o krozal ar mor e beg ar Raz,  
Biskoaz den n'hen trémenaz eb santout aon pe c'hlaz,  
Bet omp en enez Sizun, en Heussa, Molenez,  
En enez Vaz, er Iodet, ive er seize enez.

Eur bloavez omp bet eurus evel daou eal Doue,  
E pep lec'h, pa hor guelet, ann holl a lavare :  
« Setu kloarek ar Rannou, soun evel eun derven,  
« Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rozen. »

IV

Devez pardon sant Herbot, e kleviz eur c'helou,  
En euz heuzet vo c'halon, en eur mor a zaëlou,  
Gant he zad ha gaut he mamm d'amm mestrezik Metik,  
Ez oa choazet da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan 'ze oa diot, hep furnez hep skiant,  
Ne gare war ann douar nemet ar gwin-ardant,  
Metik paour pa er gwele a grene gant enkrez,  
Hogen, he zud oa dallet, alias ! gant ann danvez !...

Mont a riz primm d'he gwelet neuze da Gerzanton,  
Dre ma tostaen em c'hreiz, e kreñe va c'halon,  
War dachen ar bourg o són e oa ar hiniou,  
Tud ann eured ha Metik heuzet en he daëlou.

Metik, a dreuz he daëlon, a reaz ouz-in eur sel  
En eur lavaret : « Kouraj, Kouraj, mignon fidel !  
Monet a ra en ilis, lavarat 'ra d'ar belek :  
« Gwenole eo a garan, hag hen vo va fried !...

Koueba reaz d'ann dour, raktal ar benn-herez,  
Ha douget e oe dioc'h-tu euz ann ilis er mez ;  
Dispak he c'hoef, he dillat, ha dispak he bleo ;  
Seblantoul a re beza eun elik paour maro.

Mantret holl gant ar glac'hар e koueziz dann daoulin,  
En eur grial : « O Metik, sell a druez ouzin !...»  
Pokat a riz d'he dornik, d'he diou chod, d'he c'herc'hен ;  
O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien !...

Ann disesper en dro din, evel eur vantel blom,  
A gassaz pell a c'hanon, pell war zu Mene-Hom...  
Pa skiant a so kollet, va c'halon a so ien...  
O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien !...

Eiz de goude, asezet e kreiz koat ar Rannou,  
War va diou chod e rede diou feunteun a zaëlou...  
Pa glevis e Remengol o són ann anter-noz  
E lavaris eskamet : « Va Doue, deoc'h bennoz !...

« O Gwerc'hez vad Remengol, sellit oc'h va glac'hар,  
» Aman oun deut da vervel brema war ho touar,  
» Varc'hoaz pa zavo ann heol arc'bantet en envo  
» Dindan an derven goz ma, me vo k'rev maro !...

« O Metik, va dousik koant, te p'hini a garien,  
» Kenavo 'lavaran did er bed ma da viken !  
» Gant ar maro unanet, ni c'hoaz en eum garo,  
» Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo !!!...

V

Ann de varlerc'h, da zao heol, eun durzunel hep par  
A hirvoude en derven he c'hlemon a c'hlac'hар ;  
Ar c'hoarek a ioa maro, maro gaat ann' anken,  
En eur lavaret : « Metik te p'hini a garien !

Ar c'hoarek paour a starde, c'hoaz war he vuzellou,  
Kroas aour ha bleo du Metik, glebiet gant he zaëlow ;  
War ann derven'n doa skrivet hano he garante,  
Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'heze.

Kasset eo bet ar c'hoarek da vere ! Remengol,-  
Ha sebeliet e disheol iliz sakr Remed-oll,  
Iliz Patronez he vamm en deuz bet ken karet !...  
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit 'vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en he vele douar !!!...  
Eur miz goude oe klevet huanadou glac'hар...  
Eur plac'hik gwisket e dû, e bered Remengol  
Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed-holl.

O tremen dre ar vered, velaz war eur men be  
Skrivet neve flamm hano he mignon Gwenole,  
Eprd ann noz daoulinet, Metik wele dourek,  
Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek.

« O Gwenole, eme-z-i, setu te o repoz  
» E douar sakr Remengol ez out deut d'am gortoz,  
» Mes kent ma tarzo ann de, o va muia karet,  
» Er be man, dre zorn Doue, ni vez a unanet !!!...

Da zao-heol eur belek koz 'vont, da bedi Doue  
He c'havaz anter-varo, gourveet war ar men-bet,  
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolven ha pardon,  
Metik a varvaz laouen, raktal, gant rann-galon !...

Ehn eur vogeden ezanz ene gwen Metik kez,  
'Vel eur goulmik, a njaz d'ann ên gant ann elez ;  
Euz a varados Doue eur goabren arc'hantet,  
War tour Iliz Remengol, neuze, zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hez ha Sent koz Breiz-Izel,  
Deuz kurunet Gwenole hag he vestrez santel,  
Barzet ann amzer gwechall, drant, war ho zelennou  
Da Zoue, e brezounek, a gane ho gwersiou.

Sebeliet e korf Metik, kichen korf Gwenole,  
Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant egile..  
Eur c'holoarek karantezuz 'n deuz war ho be skrivet  
Ar c'homzou truezuz man, gant he zaëlou mesket :

« Aman e repos, e peoc'h, kloarek koat ar Rannou  
» Den a feiz hag a galon, den a garie he vro ;  
» En'e gichen eo kousket penn-herez Kersanton,  
» Metik, ann elik Doue, maro gant rann-galon !!! »

O gwerc'hez vad Remengol, setu ho taou vuguel  
Kousket e tal hoc'h Iliz na dindan hoc'h askel,  
'Vel eur Vamm garantezus war gavel he mabik,  
C'hui dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleier, ograou Remengol, truezuz c'hui zono,  
Barzet ha pelerinet, daëlou c'hui a skuillo,  
War be Metik, Gwenole, pa rafet ho peden,  
Eur beden a garantez ha karget a anken !...

Bevit e doujanz Doue, tud iaouank Breiz-Izel,  
Pedit Gwerc'hez Remengol evit ma viot santel ;  
Sonjitive e Metik, sonjit e Gwenole,  
Bezit evel d'ho fidel ann eil d'egile.

---

Koat ar Rannou, (Rann, Rannou, chants, séries), bois des chants ou des séries. Koat braz e dero, a zo e kichen, ha dar zao heol da ilis Remengol. Ann Drouiset, beleien ar Vretonnet, gwechal c'hoas difeiz a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eul louzaouen, hanvet huelvar, p'hini a zao war ann dero.

Barz, barzet, (barde, poète). Bep bloaz ive nem gave e koatar Rannou hag e Rumengouët, hiriohanvet Remenglo, Barzet ann Arvor. Ar re ma a oa tud a skiant pere a gane gwersiou great gant ho, war ann traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meuleudi Teutntès, Doue faoz, p'hini a oa enoret ell eac'h e ma brema iliz Remengol. D'ann hini vije

hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun dêlen aour,  
war p'hini ar Barz a gane he soniou.

Gwenklan, Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent  
m'a teuaz en-hi ar feiz krisien.— Breman zo c'hoaz e Breiz  
kalz Barzet, pere laka ho studi hag ho foan evit kenderc'hel  
en hon touez ar feiz ha iez hor bro. Er penn kenta eus ar  
barzet e ma ann Aviel ; Troude, barz ar vugaligou ;  
Kemar, person ha barz sant Laurans ; ar Iann, barz Koat-  
ann-Noz ; Milin, barz Laouenan Breiz ; Rannoù, barz  
Roc'h-Allaz ; Joubiou, vikel vrás a eskopti Gwenet, barz  
sant Gwen-Eal ; ann abad Klec'h, barz Rungolven ;  
Kaourintin Thomas, barz ann Tour-Tan ; Prosper Proux,  
barz Kerne ; ann Hegarad, barz Plouek ; I.-P.-M. ar  
Skour, barz Itron-Varia Remengol ; F.-M. ann Huel,  
barz Ker-ar-Born ; Olier Souvestre, barz Plouian ; ann  
abad Poullaouek, kure Landevennek, barz sant Gwenole ;  
Karis, person Plougras, barz Meine-Bre ; Guernisson,  
barz Keravel, ha kalz a re all, pere o deuz gret eun niver  
bras a werziou ha soniou kaer.

« Kanit anez ho, Breiziz, rag beza int gwerziou  
« Gret gant skiant ha kalon ha gant gwel vad komzou.  
« Gret int e brezounek mad, nan e koz vrezounek,  
« Evel ar re zo kalz re e brezounek-gallek. »

---

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santed,  
Kanit gloar ha meuleudi da vamm tud Breiz-Izel,  
Ho Mamm hag ho Patrones. Rouanes ar bed oll,  
Mamm ann dud paour, ankeniet, Gwerc'hez vad Remengol.

## I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

Propriété : LESCOUR.

# ANN HINI A GARAN

War eun ton neve.

Ann hini a garan 'zo koant evel ann heol.  
Karantezuz evel Gwerc'hez vad Remengol.

Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,  
D'ann hini a garan roit hepret ho pennoz.

Ann hini a garan 'zo dous evel al louar,  
En noz pa sklerijen bugale ann douar.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo vel ann alc'houeder  
D'am c'halon paour e kan soniou, gwersiou tener,  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo vel ann durzunel,  
Pa ve maro he far, nem doll da verval.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo eun elik Doue,  
Eun elik dous a ra joaustet va bue.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan a zo dous he hano,  
Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan em c'halon a chomo,  
'Tre ma vin e bue, ha goude va maro.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan gane-me en disheol,  
A reposo eun deiz e bered Remengol.  
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan e palès ann Drindet,  
Gane-me da viken a vo karet, karet.  
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,  
D'ann hini a garan roit hepret ho pennoz.

I.-P.-M. AR SCOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.